

Degasit ganeoc'h

un
tog
heol

Treuswiskamanchoù

ur
chupenn
c'hlav

ur sac'h-
kousket

un deltenn evit ar
re vrasañ

boutoù
sport

dilhad
kouronkañ

Berr-ha-berr



Degemeret e vez bugale e staj KEAV : graet e vez war-dro bugale perzhidi ar staj e-pad ar c'hentelioù.

Adalek 6 vloaz e vez degemeret ar vugale en ur greizenn-dudi a reomp «KEAV evit ar vugale» diouti.

Digor eo ar greizenn-dudi adalek 9^e betek 5^e evit an obererezhioù gant un diwallerezh adalek 9^e-1/4 ha betek 5e 1/4 d'an abardaez, eus al Lun betek ar Gwener.

D'ar Sul kentañ e c'hall bezañ degemeret ar vugale adalek 2^e g.k. betek 8^e diouzh an abardaez ha d'ar Sadorn diwezhañ adalek 9^e betek 3^e g.k.

E mare ar pred kreisteiz e chom ar vugale dindan giriegezh ar «greizenn» evit ma'z afent war-raok gant ar brezhoneg ouzh taol hag evit krouiñ ur spered a-stroll etre ar vugale hag etre ar vuhezourien hag ar vugale. Da goan e c'hall ar vugale bezañ gant o zud da lakaat e pleustr ar pezh a zo bet desket ganto.

Darempredoù



KEAV : titouroù hollek, enskrivadurioù
keav@keav.bzh

22 hent Mouliouen – 29000 Kemper
02 98 95 59 31/ 06 95 03 60 96 /

KEAV evit ar vugale ha KEAV evit ar grennarded
(titouroù, paperioù da zegas)

kd@keav.bzh / 06 22 53 13 21



Ar raktres



Degemer ar vugale asambles gant o zud evit kreñvaat al liammoù e brezhoneg en tiegezh a zo unan ouzh palioù KEAV.

Kinniget e vo obererezhioù liesseurt a gloto gant oad ar vugale.

Kampoù bihan, div nozvezh anezho, a vo kinniget d'ar vugale adalek 9 bloaz. Div nozvezh a dremenint dindan deltennoù.

Hervez an niver a vugale e vo daou pe dri rummad bugale heñchet gant buhezourien stummet.


Pep tra a vo kaset en-dro e brezhoneg penn-dabenn.

Eus 9 eur mintin da 5 eur d'an abardaez e vo skipailh « KEAV evit ar vugale » e-karg er greizenn (prantad merenn ivez) .

Dindan giriegezh o zud e vo ar vugale ar peurrest eus an devezh ha pep hini a sento evel-just ouzh reolenn KEAV : « pep tra e brezhoneg » !

Aozet e vo an devezhioù ha kinniget an obererezhioù diouzh an tri fal pennañ :

- doujañ ouzh lusk ar vugale ;
- diorren an emrenerezh ;
- pinvidikaat an darempredañ.



Hag ouzhpenn



Kampañ

Sizhun 1 : bugale eus 6 da 17 bloaz

ha **Sizhun 2** : bugale eus 6 da 17 vloaz

Ar re vrasañ a yelo da gampañ e-pad daou zevezh ha div nozvezh. Kinniget e vo a bep seurt obererezhioù dezho. Kaset e vint di gant tud ar greizenn, sikouret gant tud ar vugale. Kinniget e vo d'ar vugale adalek 9 bloaz.

D'ar re vihanañ e vo kinniget dezho un nozvezh kampañ e Kastellin (ne vo ket ret), o zud a c'hallo dont da gousket di ivez an nozvezh-se.

Dafar da zegas evit pep bugel :

ur sac'h-kousket, un deltenn ma'z eo posupl, un tok, lunedoù-heol, botoù bale, ul lamp godel

Hag er memes mare

Ar vugale dindan 6 vloaz, gant tadig pe mammig, a vo degemeret en eil sizhun er rummad « Brezhoneg er familhoù ».

Priz ar staj :

Bugale kentañ derez : 190€/160€

Skolajidi & liseidi : 220€/190€

(An eil priz=bugale o zud gant ur priz distaolet).

Priz evit ar vugale a chom e Penn-ar-Bed

(gant sikour Kuzul-Departamant 29) :

Bugale kentañ derez 163€/133€

Skolajidi & liseidi 193€/163€

Un distaol a vo graet adalek an eil bugel ar familh.